

Devezh-studi C'hwevrer 2010

Dernière mise à jour : 02-02-2010

KAMP ETREKELTIEK AR VREZHONEGERION a ginnigo un devezh-studi AR BREZHONEG EUS BRO-GERNE-IZELDA VRO-GWENED-IZELD'ar sadorn 20 a viz C'hwevrer 2010 e Kreizenn an Amzer Nevez 56270 SOE – PLAÑVOUR. Amañ-dindan e kavoc'h roll an devezh hag ur follenn enskrivañ- Adalek 9.30 eur : Degemer ha banne kafe- Da 9.45 : Gant Lukian KERGOATEtre levezon ar Gwalarn (Leon) hag ar Gevred (Gwened) : Brezhoneg Kerne- Izel, ur rannyezh ha n'eo ket bet lakaet biskoazh da standard. Genidik eo Lukian Kergoat eus Plogoneg. Kelenner brezhoneg ha yezhoniezh e Skol-Veur Roazhon eo bremañ. Kalz a studiadennoù zo bet savet gantañ hag en o zouez labourioù war fonologiezh ar brezhoneg. E Kemper emañ o chom. Da 12.30 : Merenn Da 2 eur : Gant Pêr-Yves KERSULEGHeñveliezh ha disheñveliezh etre brezhoneg Bro-Gerne-Izel ha Bro-Gwened-Izel : Pouez-mouezh, vogalennoù, kensonennoù, geriaoueg. Ur sell war ar pezh a zo "arkaik" er yezh. E-kichen Banaleg emañ Pêr-Yves o chom ; e dad a zo eus Skaer hag e vamm oa eus Koloreg. Abaoe pell emañ oc'h ober ul labour dastum e Bro-Genre (izel ha kreiz) hag e Bro-Gwened (izel hag uhel). Un dezenn emañ o prientiñ war ar brezhoneg. Kelenner eo e Kemper hag e Kemperle. Displeget e vo ar c'haozeadennoù diwar harp enrolladurioù ha kartennoù diskouezet gant ur videobanner. Tro 5 eur - 5.30 eur : bilañs an devezh staj. Priz an devezh : 22 € (frejoù pedagogel ha pred) Evit en em enskrivañ : Da gas da : KEAV 22 hent Moulouen 29000 KEMPER - Pgz 02 98 95 59 31 Pe dre bostel : keav@wanadoo.fr ANVANV BIHANCHOMLEC'HPgz : Postel : A